


Musée
de Bretagne
lesChampsLibres



**TEULIAD PEDAGOGEL
KENTAÑ DEREZ**

HENAMZER EMIT-HU ?



Taolenn

Ar weladenn er mirdi.....	4
Programmoù skol.....	6
Teuliad teuliaouiñ.....	8
Evit mont pelloc'h.....	15

Ar weladenn er mirdi

Savet eo an teuliad-mañ evit ho skoazellañ da brientiñ ho tonedigezh e Mirdi Breizh. Kavout a reoc'h ennañ dibun ar weladenn, ar programmoù skol hag an dafar a c'hellfec'h kaout ezhomm anezhañ.

Prantad	Henamzer galian-ha-roman (-57 ar. J.K./ 476)
Live	Eus ar C'HD2 d'ar bempvedidi latinourien
Pad	1e30
Doare	Digoust
Palioù pedagogel	<ul style="list-style-type: none"> - Diforc'hañ ar prantadoù istor bras ha lec'hiañ en amzer prantad an Henamzer - En em reteriñ en ur mirdi - Dizoleiñ ul lec'h a c'hlad lec'hel - Diorren ar skiant varn : arguzenniñ, reiñ e/he savboent, klask gouzout muioc'h diwar-benn traezoù ar glad evit sevel gouiziegezhioù - Diorren ar barregezhioù arseliñ, deskrivañ, keñveriañ

Dibun

Diwar traezoù a vremañ e klask ar skolidi er mirdi traezoù o doa bet an hevelep implij en Henamzer. Evel-se ez eont d'ober anaoudegezh gant ar vuhez pemdez d'ar mare galian-ha-roman. Dre an abadenn e c'heller stagañ gant ar sevenadurezh nevez a ziw an eus aloubadeg ar Romaned, o lakaat a-wel-kaer an degasadennoù galian ha roman. Ober a ra ar skolidi anaoudegezh gant doare an eskemmoù ekonomikel, gant an hentoù roman war sevel, ar vuhez pemdez (kinklañ, boued, skritur), an artizanerezh, ar c'hêrioù roman (savadurioù foran, relijiel) hag ar relijion. Gant ur prantad eskemmañ ha komz e c'hellont kompren dre zastumadoù ar mirdi perzhioù ar vuhez c'halian-ha-roman en Arvorig.



An obererezh dre ar munud

E stern an hanterouriezh-mañ e vez lakaet e kerz ar skolidi sac'hadoù traezoù a vremañ a bep seurt. Rannet eo ar c'hasad e meur a strollad a zo bep ur « sac'had traoù » dezho. Rankout a ra pep strollad, diwar an traezoù a zo en e sac'h, kavout ar c'henglotadurioù etre an traezoù a vremañ hag an dastumadoù eus an Henamzer a-benn diskoachañ an doareoù bevañ en Arvorig. Ret eo dezho klask gouzout neuze peseurt implij a zo da bep traezenn, a-benn kavout he c'hevatal en Henamzer. Evit se e c'hellont ober gant ar c'hartelloù hag ar spisverkoù liesseurt kinniget er mirdi.

Skouerennoù eus traezoù a vremañ



Kabell-rod



Bonn kilometrek boas



Hejigel



Diñsoù



Houarn-marc'h

Traezoù galian-ha-roman a-geñver ganto



Pezhkinkladur kirri rodek



Bonn miler



Hejigel



Diñsoù askorn



Sandalennoù

Programmoù skol

Kelc'hiad 2

Ar pep retañ degaset d'ar sich boutin gant an danveziou kelenn liesseurt

Skoazellañ a ra ar spisverkoù amzer da verzhout ha da zeskiñ ar c'healiou a gendalc'h, a heuliad, a gentelezh hag a c'houdeelezh, a ziasered. Kregiñ da spisverkañ un nebeud darvoudoù war hir amzer, emouezañ ouzh gwirvoudoù ha darvoudoù an amzer dremenet hag ouzh ar c'heit hir pe hiroc'h a zisparti ac'hanomp diouti, eo ar pazennoù kentañ a-benn tostaat ouzh an amzeroniezh.

Sevel goulennoù diwar-benn ar bed

En em lec'hiañ en egor hag en amzer : en em lec'hiañ hag en em reteriñ en un douaregor ; implijout ha produiñ skeuden-nadurioù eus an egor ; urzhiañ darvoudoù ; delc'her soñj eus un nebeud spisverkoù amzeroniel.

Spisverkañ prantadoù eus istor bed ar C'hornôg hag eus istor Frañs pergen, deziadoù a-bouez ha pennoù meur zo.

Er C'HD2 e kroger da studiañ an hir amzer hag an douaregor dre un nebeud darvoudoù, tudennoù ha doareoù bevañ dezverkus eus prantadoù pennañ istor Frañs ha bed ar C'hornôg ha dre un nebeud metoù douaroniel dezverkus.



© Alain Amet

Kelc'hiad 3

Ar pep retañ degaset d'ar sich boutin gant an danveziou kelenn liesseurt

Kelenn an istor a zo da gentañ penn klask sevel ur sevenadur boutin ha reiñ da bep skoliad e lec'h en hor c'hevredigezh hag en hon amzer vremañ. Sevel a reer goulennoù diwar-benn prantadoù istor lec'h ma oa bet savet istor Frañs, ma oa bet keñveriet gant istorioù all ha lakaet e-barzh istor hir an denelezh neuze.

Istor an Arzoù

En em harpañ a ra kelenn istor an Arzoù war ar glad, rannvroel, broadel hag etrebroadel kenkoulz, dre ober gant an dafar niverel pergen. Mont a ra d'ober treugad deskadurezh arzel ha sevenadurel ar skolidi ha lakaat a ra a-gevret an darempred gant an oberennoù ha perc'hennañ ar gouiziegezhioù.

En em reteriñ en ur mirdi, ul lec'h arz pe glad

En em reteriñ en ur mirdi pe ul lec'h arz diwar lenn ha kompren an tresoù hag an titouroù. Bezañ kizidikaet ouzh semplded ar glad.

En em reteriñ en amzer : sevel spisverkoù istorel

Lec'hiañ en amzer prantadoù istor bras. Urzhiañ fedoù an eil re e-keñver ar re all ha lec'hiañ anezho e mare-mañ-mare pe e prantad-mañ-prantad.

C'hoari gant ar spisverkoù istorel hag adimplijout anezho e meur a endro disheñvel.

Pempvedidi latinourien

Evit a sell eus ar bempvedidi latinourien eo gouestlet ul lodenn eus an abadenn da dreiñ testennoù engravet war sichennoù delwennoù. Kement-se a dalvezo da skor da c'houde evit komz eus lec'h an uhelidi er gevredigezh.

Setu an destenn da heul :

IN HONOREM DOMUS. DIVINAE ET PAGI CARNUTE NI . MARTI . VICINNO L CAMPANIVS PRISCVS ET VIRILIS . FIL . SACER DOTES . ROMAE . ET AVG STATVAM CVM SVIS . OR NAMENTIS DE SVO POSV ERVNT L. D. EX. D. S.»

Troidigezh : En enor da diegezh an impalaer ha d'ar Pagus Carnutenus, d'an doue Mars Vicinnus, ez eus bet savet diwar o c'houst gant Lucius Campanius Priscus hag e vab Virilis, beleien Roma hag Aogust, un delwenn gant he c'hinkladurioù. Lec'h deroet dre zekred ar Sened.

Teuliad teuliaouiñ

Digoradur

Evel war ul lodenn vras eus Europa en em ledas ar sevenadur keltiek war ledenez Arvorig, adal ar 5^{vet} kantved a-raok hon oadvezh. E-doug Eil oadvezh an houarn pe ar prantad a reer An Ten anezhañ (war-dro -450 betek aloubadeg ar Romaned), e reas poblañsoù kelt o annez tamm-ha-tamm e Kornôg Europa ha war an talbenn atlantel hep na c'hellfed muzuliañ lod an aloubadegoù pe an heñvelekadurioù da-geñver an araokaat-se. Ar pezh a zo sur eo ar c'hemmoù sokial stank ha boutin da Europa a-bezh a oa bet merzhet d'ar prantad-se er rannvro (annez, aozadur politikel, artizanerezh, kredennoù, arz).

Graet e veze Galianed eus ar Gelted gant ar Romaned. Komz a raent yezhoù keltiek, tra ma veze komzet latin gant ar Romaned. Merket eo deroù prantad an Henamzer galian-ha-roman e broioù Galia gant aloubadeg ar Romaned ha ganti e tegouezhas ar skritur, al latin. Daoust d'ar C'halianed gouzout diouzh ar skritur eo distank ar roudoù anezhi.

En Henamzer en em lede hor bro war un dachenn anvet broioù Galia gant ar Romaned, kalz ec'honoc'h eget Frañs a vremañ. Hor rannvro, Breizh, a veze graet Arvorig anezhi ha ledanoc'h e oa eget hiziv : Normandi a oa enni hag en em ledañ a rae a-hed an talbenn atlantel. Rannet e oa tiriad Breizh istorel e 5 pobl : an Osismied (Vorgium/Karaez), ar Weneted (Darioritum/Gwened), ar Redoned (Condate/Roazhon), an Namneted (Condevicnum/Naoned) hag ar Goriosolited (Fanus Martis/Kersaout).

Pinvidik e oa broioù Galia : gant labourerien-douar e-leizh e veze produet ed, edaj ha gant an artizaned e veze fardet bravigoù, armoù, ostilhoù, traezoù pri poazh... Gwerzhet e veze an holl draezoù-se, bras o ferzhded, d'ar pobloù amezek ha kalz a startijenn a oa gant ar c'henwerzh. Ar Romaned, amezeien ar C'halianed, a oa sachet-bras gant an holl binvidigezhioù-se !

Ganedigezh Arvorig galian-ha-roman


C'hoarvezout a reas brezelioù broioù Galia etre 58 ha 51 ar. J-K. Lakaat a reas un emgann war vor a-vaez d'ar Mor Bihan, a reer «emgann ar Weneted» anezhañ, enep-ha-enep Romaned hag Arvorigiz. Trec'h e voe ar Romaned en emgann, ar pezh a verkas o degouezh en Arvorig.

Da c'houde e **52 ar. J-K.** e sailhas ar bagadoù roman war holl vroioù Galia dindan ren ar jeneral roman Julius Kezar. Pennañ a rejont d'ar pobloù galian kevredet dindan aotrouniezh ar penn Verkingetorix. Trec'h e voe ar Romaned e emgann bras Alesia a-benn ar fin.

Goude an emgann diwezhañ-se ez eas Arvorig, evel ar peurrest eus broioù Galia, e-barzh an Impalaeriezh roman. Kenderc'hel a reas Arvorigiz hag ar C'halianed gant o doareoù bevañ en ur biaoekaat ul lodenn eus ar sevenadur roman a veze skignet war an tiriad a-bezh. Ar galleg, ganet diwar al latin hag un dindanad a c'halianeg, zo unan eus hêrezhoù ar sevenadur galian-ha-roman.

Ar c'hêrioù o zreuzkas ar romanekaat

Goude an aloubadeg e teuas kêrioù nevez war wel - ar c'heodedoù - ha treuzfurmet e oa bet kêrioù kozh zo diouzh ar patrom roman : sevel temploù, kibellioù, ańfiteatroù, tresoù kêr karrezek...Dre ziorren ur rouedad hentoù ha karrbontoù e oa bet aesaet an eskemmoù marc'hadourezh er bed roman a-bezh. Merañ Galia hag Arvorig pergen a zegouezhas dreist-holl gant Aogust etre -27/- 14 ar. J-K., ne voe ket diouzhtu an aloubadeg neuze. Da skouer e voe diazezet Condate war-dro -15/-10 ar. J-K.



Tres Vorgium (Karaez), pennlec'h an Osismied

Diorren a reer an hentoù-liammañ

Stank ha kempennet mat e oa ar rouedad hentoù galian. Diorroet e oa bet gant ar Romaned. Tennañ a rejont gounid eus an ahelioù bras etre ar c'heodedoù neuze ha gant se e c'helljont lakaat da vont ha dont buan tud, marc'hadourezh ha dreist-holl soudarded e karg eus ar surentez war an tiriad en e bezh.

En Arvorig e oa juntet pennlec'hioù ar c'heodedoù gant hentoù hir eus ar reter d'ar c'hornôg. Pelloc'h o doa skoulmet liammoù gant traoñienn al Liger met ivez gant Lyon, kerbenn broioù Galia. Dre un eilrouedad e oa liammet ar pennlec'hioù hag ar bourc'hadennoù dindan o reolerezh.

Lakaet e veze ar bonnoù miler e maen a-hed an ahelioù-hent evit merkañ an hent da vont d'ar c'hêrioù. E stumm ur granenn e oant peurliesañ. Ober a reer bonnoù «miler» anezho rak d'ar mare-se e veze muzuliet an hedoù e miltirioù roman, da lavaret eo war-dro 1 480 metr.

Kemer a reas ar miltir roman (war-dro 5000 troad) lec'h al lev c'halian a oa brasoc'h he hed : etre 2200 ha 2500 metr.



Bonn miler Maximin – prantad galian-ha-roman – Greunit – Kavet e Roazhon, straed Rallier du Baty (1890).

An eskemmoù kenwerzh o kreñvaat en Arvorig

Ar priajoù siellek, fardet e kreiz Galia, a veze enporzhiet en Arvorig. Graet e veze gant an hentoù-stêr, al Liger peurgetket, evit o c'henwerzh.

Kavet ez eus bet leizh a añforennoù, ar pezh a ziskouez e veze enporzhiet produioù a bep seurt ha kement-se a-skeul-vras : eoul ha dourioù-hili eus Spagn, gwin eus a bep seurt rannvroioù Galia hag Italia, frouezh eus Afrika an Norzh... Porfumoù, gwelzeladoù, spisoù pe gwer kraï a zegouezhe eus dremmwelioù pelloc'h zoken (Egipt, Azia-Vihanañ, Reter-Pellañ).

Ar garum, un hilienn diwar besked hag a veze kavet gwall vat gant ar Romaned ken m'o doa diorroet ur greizenn brodiñ e Plomarc'h e Douarnenez, ar c'hig-sezon hag ar metaloù az ae d'ober produioù ezporzhiañ.



Tonellig eus an 3vet kantved – prantad galian-ha-roman – en onn hag houarn – kavet e Roazhon, plasenn Hoche (1997).

An añforennoù, bresk ha diaes da zornata, a voe distroadet gant an tonelloù, ijinet gant ar C'halianed. Mont a reas o implij war hollekaat en 3vet kantved goude Jezuz Krist. Ganto e c'helled gwellaat an treuzdougen hag ar stokañ dre ma oant solut ha dre ma padent pell. Gellet a raed mirout eus ar gwellañ ar pezh a veze lakaet e-barzh. Betek-henn e veze beuzet an Impalaeriezh roman gant an añforennoù, ar pezh a ziskouez e veze ezporzhiet a-yoc'h produadurioù eus ar Su, gwin hag eoul pergen. Endalc'had an donell kinniget amañ n'eo ket anavezet sklaer.

An treuzdougen


D'ar mare-se e tilec'he an dud war droad, war varc'h pe gant ur c'harr. Implijet e veze kezeg evit obererezhioù liesseurt. Gellet a raent servijout evel doare dilec'hiañ pemdez, da stlejañ kirri, pe c'hoazh evit ar brezel. Adal ar mare galian-ha-roman e veze implijet ar sandalennoù-kezeg, elfennoù mamm an houarnoù-marc'h, evit diwall karnioù ar c'hezeg. Stagat e oant outo gant lêrennoù.

Goude bezañ aloubet broioù Galia e oa bet degaset gant ar Romaned neket hepken o gouiziegezhioù hag o zeknikoù da sevel kêrioù hag hentoù, met da sevel pontoù ivez. Ar pontoù a oa anezho e Galia met savet e oant en un doare rustoc'h, gant koad pe mein gros hep mañsoniezh. Mañsonerien vat e oa ar Romaned ha dafaret o doa neuze da liammañ ar c'heodedoù etrezo gant pontoù solutoc'h ha padusoc'h.

Renket e veze ar peulioù-se dindan ar chaoser. Mont a raent d'ober ur framm koad a-bezh evit sevel hentoù an Henamzer. War a seblant e oa ur «rakpont», hag a roe an tu da vont war ildraoñ betek ar pont. Dre ar pezh-labour-mañ e c'helled treuziñ un takad geuniek.



Peul derv eus ar bloaz 50 ar. J.K. war-dro ha kavet e Gwisec'h, Ar Chaoser Izel, e 1995



Maketenn eus pont Gwisec'h

Ar vuhez pemdez hag an artizanerezh

A drugarez d'ar peoc'h gwarantet gant an armeoù roman e oa pinvidik ha bleunius broioù Galia. En em romanekaat a rejont hag ar C'halianed, an uhelidi dreist-holl, a zegemeras frank doare bevañ ar Romaned. Kenderc'hel a reas ar C'halianed gant lod eus o hengounioù met ivez gant o chemet war meur a dachenn evel an artizanerezh pe al labour-douar.

Priajoù war ar pemdez

Gant an endalc'herioù, dezho stummoù ha tresoù kinklañ liesseurt, e veze implijoù gwall zisheñvel neuze. Ouzhpenn ar priajoù siellek enporzhiet e oa ul listri boutinoc'h graet er vro. Bez' e oa armoù-kegin evit poazhañ, fardañ pe stokañ boued. Gellet a raed ivez lakaat enno dour, gwin, eoul, garum...

Ul listri diseurt

Mont a rae pri-poazh, askorn, arem, ha koad, adkavet ral a wech, d'ober danveziou kraï al listri. Implijet e veze stank al lavnennoù war ar pemdez evit ar c'hontilli, an ostilhoù labour pe c'hoazh an aotenoù.

An troad kontell-mañ a seblant bezañ bet torret a-raok ma voe staget e lavnenn outañ. Adkavet e oa bet e Roazhon, straed Sant-Malou, en ur c'harter ma oa atalieroù tablezerezh (adkavet e oa bet eno leizh a zrailhoù askorn). Pan, tudenn eus ar mojennerzh gresian, a oa doue an Natur hollvedel. Gwarezer ar vesaerien hag an tropelloù e oa. Peurliesañ e veze skeudennet gant treid bouc'h ha kerniel. Alies e veze kemmesket Pan gant ar satired (gwazed hanter vouc'hed anezho, dezho divskouarn, lost ha treid bouc'h) ha ne veze ket mui skeudennet damheñvel ouzh un den neuze met en un doare viloc'h ha guesoc'h. Ouzhpenn gant an natur e oa liammet Pan gant ar strujusted.

Chom a rae ar pezhioù orfeberezh, an endalc'herioù gwer hag arem, raloc'h, traoù ur renkad brientek.



Manche de couteau représentant le dieu Pan, os, Rennes



Spilhenn-alc'hwez e kouevr «lost paun dezhi», mare galian-ha-roman, kavet e Roazhon, straed Sant-Malou, 8 sm

Kemer a ra ar c'hiz roman he c'hreñv

An tonegoù, enporzhiet eus Roma, a gemeras lec'h ar bragoù, e-touez ar renkadoù ren dreist-holl. Trebadout a reas ar cucullus (mantell gant kabuch), gwisket d'ar mare galian, betek an 3^{vet} kantved.

Eus an holl zilhad liesliv-se n'eo manet nemet ur boutonoù hag ur spilhennoù-alc'hwez bennak. Gant ar rikoù bihan-se, eeun (un neudenn arem pleget hepken) pe kemplezh, e veze staget lostennoù ar wiadenn evel ma reer gant ur vrochenn.

Bravigoù dindan levezon

Gant ar maouezed galian e veze gwisket perlezennoù gwer dija; met dont a rae an intailhoù, pe mein engravet kleuz diwar mein hanter-brizius (oniks pe maen Kalkedonia da skouer) war-eeun eus ar sevenadur roman. E-kichen un nebeud pezhioù dibar, evel gwalennoù aour, e oa disteroc'h ar braz eus an traezoù : gwalennoù ha troioù-brec'h arem, gwer hag arc'hant, met raloc'h, chadenigoù...

Kinklerzh ha ficherezh blizidik

Prederiet e veze war ar c'horf gant kalz a vlizidigezh. Moullañ a rae ar maouezed o blev da sevel hogennoù kemplezh, evel m'en diskouez an delwennig-mañ e pri poazh gwenn (amañ e-kichen). Adkavet ez eus bet leizh a rikoù evit ar fardañ pe ar ficherezh, evel, da skouer, ar pladenigoù fard, ar pigoselloù, melezourioù pe c'hoazh orselioù porfum.



Elfenn eus un delwenn vaouez e pri poazh, kavet e Roazhon e 1991, 7 sm uhelder.

Ar vuhez intelektual, ar c'hoarioù hag an diduamantoù

Berzh a rae ar c'hoarioù hag an diduamantoù

Berzh bras a rae ar c'hibelldioù, ar c'hoarivaoù, an añfiteatroù, lec'hioù foran ha dudi deuet eus Roma, e-touez ar boblañs en he fezh. Tra ar re binvidikañ a oa ar chase. Gant leizh a jedoueroù hag a ziñsoù, graet gant askorn, arem pe gwer, e vez diskouezet pegen dedennet e oa ar bobl gant ar c'hoarioù chañs er vuhez pemdez. Ar re vihanañ, evit o c'helo, o doa o hejigell gant grizilhon dija.

Meur a stumm a c'helle bezañ gant an hejigelloù, stummoù loened hag all. Graet e vezent gant metal pe pri-poazh, evel ar skouerenn nemeti miret er mirdi. Testeniekaat a ra an testennoù kozh eus implij an traezoù-se a reer « crepitaculum » anezho e latin, diwar ar verb « crepare » a dalv kement hag « ober trouz ». Diaes eo gouzout hag un hejigell eo an draezenn-mañ, pemp bos dezhi, met trawalc'h eo hejañ anezhi evit klevet trouz ken dibar an hejigell, ar pezh a ra anezhi unan eus ar c'hoarielloù koshañ evit ar re vihanañ, ha trebadout a ra hec'h implij abaoe daou vilved.



Hejigell pri poazh, eus ar 1^{añ}-3^{vet} kantved, kavet e Roazhon TATEK Sant-Malou-II. 7 sm uhelder.

Skritur hag enskrivadurioù

Sevenadurezh ar skrid e oa ar sevenadurezh roman Al lizherenneg latin ne oa ket anavezet gant an holl met stank e oa an enskrivadurioù koulskoude, war ar podoù, ar mein pe war mogerioù an tiez. War pezhioù priaj zo ez eus roudoù eus kontoù, anv ar poder pe hini implijer an draezenn. Implijout a raed tablezennoù koad goloet gant koar evit skrivañ gant ur goustilh. Dre ar beg lemm e c'helled tresañ ha gant ar beg all, plat, e c'helled difaziañ.

Ur relijion azas

Amprestañ a rae ar relijion roman digant kredennoù gwall liesseurt o orinoù : roman, gresian, egiptat...Degemeret e voe gant tud Arvorig en ur virout o doueed dezho. Liammet e voe Meurzh ouzh doueed c’halian neuze, evel Mullo pe Vicinnus. Ha Merc’her a voe staget e anv ouzh hini Atepomarus.

Liesdoueat e oa ar C’halianed-ha-Romaned : krediñ a raent en ur vordilh a zoueed. Lidet e veze an doueed e temploù. E pep tiegezh e tegased soñj eus an doueezed-mammoù (Gwener, Minerva, Attis) war-bouez delwennigoù pri poazh gwenn, pe c’hoazh eus al Lared, doueed gwarezerien an tiegezh. An doueed-se, kensakret dre aoterioù bihan, a roe o gwarez evel-se. Azeuliñ an impalaerien, enoret evel doueed, a oa ret da holl bobloù an Impalaeriezh roman, ar pezh a zispleg e oa merket o anv war ar bonnoù miler.

Doueed roman a orin etruskat e oa al Lared (diwar an etruskeg Lars hag a dalv kement hag aotrou). Klotañ a raent gant spered an hendadoù ha doueed dibar pep familh e oant. Evit kaout o gwarez e veze gouestlet ul lec’h dezho en ti ha profet e veze boued dezho war al Lararium, templ ar gêr.



Evit mont pelloc’h

An dafar da furchal ennañ

An dafar er Maezioù Frank

- Adkavit holl draezoù an hanterouriezh-mañ war : http://www.collections.musee-bretagne.fr/parcours.php?id=musee:MUS_TH_PARCOURS_CONCEPTS:182
- Porched dastumadoù mirdi Breizh
- Tablezennoù Roazhon e Levraoueg Roazhon Meurgêr



Hanterouriezh klokaat

- Ragistor ar mein (eus - 700 000 da -2500 ar. J. K.)
- Anna Vreizh e dastumadoù ar mirdi




Notennoù

Diskar an impalaeriezh roman

Gwanaet e voe an Impalaeriezh gant enkadennoù ekonomikel ha politikel bras an 3^{vet} kantved. Taget e veze ar c’hêrioù hag ar maezioù gant aloubadegoù ha riblerezhioù. War fallaat ez eas toledoù a-bezh eus ar C’heodedoù. Er c’hantved da heul, evit ersaviñ ha diwall ar vro diouzh ar gourdrouzoù diavaez, e voe savet kreñvlec’hioù e porzhioù Alet (Sant-Malou) ha Brest. Goudoret e veze ar c’hêrioù pennañ gant ramparzhioù. Dre ar savadurioù difenn-se e kadarnaas an Impalaeriezh e oa adkroget da ren war an tiriad. Aspadennoù eus ramparzhioù Condate a c’heller gwelet e Roazhon.

Series of horizontal dashed lines for taking notes.



ArMaeziouFrank

Mirdi Breizh – Levraoueg – Egorenn ar skiantoù

Mirdi Breizh - Ar Maeziou Frank

10 bali ar Gevredidi - 35000 Roazhon

Darempred hanterouriezh ha mirout plasoù :

Paskal Nignol, hanterour sevenadurel : p.nignol@leschampslibres.frr

Da yaou e vez ar gweladennoù e brezhoneg

www.musee-bretagne.f